

"Evidomp, Reizhvriaded ar Gornog, ez eus ur c'hoarvezad a vennomp arveziñ evel pouezek meurbet hag a reomp levenez evitañ en Aotrou I." Kement-mañ a lavarjomp da geñver embannadur "teul München", ar c'hentañ tem kenstudiet gant leuridi Iliz Roma hag an Ilizoù reizhvriat, *Kevrin an Iliz hag an Eukaristiezh, ouzh goulou kevrin an Drinded santel*².

Ar c'hendivizoù etre an Ilizoù bezant ent boudel en istor, goude ma stadont hon fec'hed a rankomp goulenn evitañ digarez digant Doue, a ziskouez ez eo "a-bouez-bras ma teufemp unan en-dro dirak an holl"³.

Goude teul München, setu deuet neuze teul Bari a embanner hiziv an destenn vrezhonek anezhañ. Diastal ez a en-dro ar c'hendivizout etre Iliz Roma hag an Ilizoù reizhvriat, gant "ar re a gred en hon Iliz, e gwirionez hag e karantez hon C'hrist"⁴. Pab Roma en deus diskouezet e levenez o welout kement-mañ: "Diziouerus eo, emezañ, an arzaeladeg vreurel, leal ha fraezh evit sklaeraat an diemglevioù ha plaenaat ar forc'hadennoù a-benn kenvonnañ an un feiz"⁵.

Tro hor boa bet da verkañ e oa manet hogos dianav teul München er metou roman. Penaos e vo kont gant hini Bari? Amañ eo kounañ ar c'helc'hlizher kaset gant Roma, d'ar 6 genver 1987, d'an eskibion, d'ar skolioù doueoniezh ha d'ar c'hloerdiou, o c'houlenn digante diorren ar studioù war Ilizoù ar Reter⁶. Adskoulmañ a ra Iliz Roma gant erbedadennoù ar Pab Pius XI en e gelañzh *Rerum Orientalum*⁷.

Gouez d'an uhelad Atenagoras — Doue d'e bardono! — e oa disroget an Ilizoù, peogwir "o doa ankouet en em garout". En em anaout o deus ankouet ober ivez. Ken e skriva an Tad E. Lanne, O.S.B., manac'h e Chevetagne, n'eo bet biskoazh ar c'hendiviz etre Katoliked ha Reizhvriaded unan aes⁸. E 1975 e oa bet diazezet ar C'hengor; pevar bloaz zo bet lakaet da sevel braslun al labour. E 1982, e oa deuet er-maez an teul kentañ — "In extremis, yet unanimously"⁸. Mard eo aes a-walc'h d'an daou skourr-Iliz termenañ ar feiz, n'eo ket anat c'hoazh ez eo peur-heñvel. Marilhañ an diforc'hioù evit a sell ar c'hevrinnoù, se zo aes; hogen en em glevout war o feizoniezh zo atav un abadenn all. Kalz labour a van d'ober. Ken e c'houlenn penneskob Sinai unvennadiñ e-sigur feiz an Iliz "kent d'an disrog", da lavarout eo ober un emglev war ziazez ar seizh sened meur hollvedel degemeret gant an Ilizoù reizhvriat.

"Stad vremenel hon c'hendiviz katolik/reizhvriat, pell diouzh tennañ da ziskalonekaat, a c'hell bezañ an dro da c'hlanaat hon eñvor hag hon ersav personel hag ilizel, ma c'hello Doue adober ar pezh a zo bet disgraet gant mab-den a-hed ar c'hantvedoù:

ar geuniezh unel ha hewel dre ar feiz, ar c'hevrinnoù hag an Iliz, bevaet gant an Awen C'hlan"⁹.

Gant an destenn-mañ ez eo heverk al larv o nesaat, bep un tamm, bep un c'hendiviz, an div skourr-Iliz. Trawalc'h eo merzout ar pouez lakaet war ar c'henwered (5 hh.), sakramanterezh an treouestl (37 hh.) hag unded ar c'hevrin (17 hh.).

1. — Ar c'henlabour pe welloc'h kenwered (Gr. συνεργία; Lt. *cooperatio*; kv. Al. *Mitwirkung*), o lakaat, eus un tu, Doue o'n em reiñ d'E grouadur, hag, eus an tu all, mab-den o respont d'E Grouer. Ar *rad*, avat, n'eus ket bet kredet e dermenañ, evit c'hoazh, na komz eus engremmoù Doue.
2. — Tizhet ez eus termenañ unded an treouestl, o c'hoarvezout eus teir c'hevrinenn, sakramantet en ur wech en Ilizoù reizhvriat ha lerc'h-ouzh-lerc'h en Iliz latin. Meneg an treouestl zo hogos un nevezinti en Iliz Roma, da nebeutañ evit ar feizidi¹⁰.

Amañ e c'heller keuziañ n'eo ket aet pelloc'h ar C'hengor gant an tem dibabet. Un emglev zo war ziorren koulskoude evit a sell an olevad, ar gevrenn oc'h ober ganimp "beleion ha rouanez". "Ankouet" e oa bet ar perzh-mañ en Iliz Roma, goude ma oa anavezet gant Tadoù an Iliz latin, evel sant Eosten da skouer¹¹, gant ar re a bouez lakaet war an Urzhoù. En diskleriadur graet e dibenn an dalc'h, e reer anv eus ar "ret (ma 'z eo) kenderc'hel da studiañ a-zevri ar c'hudennoù doueoniezhel ha liderezhel deuet war-wel e-doug hon c'hendivizout"¹². En tem kentañ a zo bremañ da vezañ studiet gant ar C'hengor e vo moarvat pledet gant ar velegiezh roueel; evit bremañ ez eo talbennet an tem evel-henn: Kevrinenn an Urzhoù e framm sakramantel an Iliz, a-benn santeladur pobl Doue.

3. — Unded ar c'hevrin, merket fraezh evit a sell kevrennoù an treouestl, a nesaer outi evit an holl gevrennoù, kreizet ma 'z int war an Eukaristiezh, "sakramant ar sakramantoù" (brizh-Denez). Gant se e teraover treshontañ kudenn niver ar c'hevrinnoù. Ur c'hevrin nemetañ ez eus, a zo Doue o'n em reiñ da vab-den. Rak-se ez eo a-bouez an termen kevrenn e brezhoneg, da verkañ fraezh unded ar sakramantoù forzh pe niver a lakoed dezhe.

Krist E-unan zo ur gevrenn (Gr. μυστήριον; Lt. *sacramentum*), eme an Abostal da Galosiz¹⁴. An Iliz ivez zo ur gevrenn¹⁵. Gant ar Reizhvriaded n'eo ket diazezet ent furmel niver resis ar sakramantoù, goude ma tuer abaoe daou c'hant vloaz d'ober gant ar roll latin seizhek. En Iliz Roma n'eo nemet gant sened Trento¹⁶ e voe peurziuzezet ar roll seizhek — gant an diforc'h savelet evit ar "sakramantalloù"¹⁷.

Ar Feiz zo trenen eus ar c'hrouet en Ankrou, eus an danvezel er speredel; an hent da unaniñ gant Doue eo. Dre ar C'hrist, dre E gevrinnoù en Iliz, e c'hellomp denesaat ouzh Gouezvoud Doue tro ouzh ar bed. Dre E gevrinnoù emañ atav ar C'hrist o labourat en E Iliz. Kenlabourat gant an Awen, kenwerediñ ganti a rank an Iliz ober, evit diskouez d'ar bed petra eo Korf ar C'hrist, diskouez ez eo unan en un doare hewel, evel ma'z eo Unan an Tad, ar Mab hag an Awen C'hlan.

1. - Homelienn, HLF 65.
2. - Embannet en HLB 12.
3. - Breur Roger eus Taizé, kendalc'h Pax Romana, 13.07.71.
4. - Partenios, uheldad Aleksandria; kv. SOP, gouhere-eost 87.
5. - kv. *Observatore Romano*, 30.06-01.07.87; *Documentation catholique*, 02-16.08.87.
6. - kv. *Documentation catholique*, 19.07.87.
7. - *Acta apostolicae sedis* 1928, 284.
8. - *One in Christ*, 1986, p. 19.
9. - 1.m. p. 30.
10. - Ouzh eskibion su-Frans, d'an 27.03.87, e venege Yann-Baol II "unded frammek ha renk pennaenkek kevrinnoù an treouesti" (*Observatore Romano*, 28.03.87).
11. - "Ar velegiezh roueel () ma'z eo gouestlet dezhi an holl re a zo lod eus Korf ar C'hrist" (*Quaestionum euangeliorum*, 2, 40; PL 35, 1355).
13. - Kounaat *sacrum secretum* ar Skolastiked.
12. - kv. *Irenikon*, LX, 2, 230.
14. - 1, 25-27.
15. - kv. Pius XII, *Mystici Corporis Christi*, 1943.
16. - Denz. 844 h.a..
17. - Adal 1208, avat, e tiskleir Inosant 3 ar seizh sakramant, evel ma rae Pierre Lombard (+ 1160), da skouer. En 12vet kantved koulskoude ez embanne Hugues eus Sant-Viktor ur roll eitek sakramant (*De sacramentis*, II).



FEIZ, SAKRAMANTOÙ HAG UNDED AN ILIZ

RAKLAVAR

- (1) Da heul hon emvod e München, e 1982, ha diwar ar steuñv degemeret gant hon c'hengor e-doug e emvod kentañ, e Rodoz, e 1980, en deus an dalc'h-mañ deraouet damantiñ gant keal ar c'heñver etre ar feiz hag ar gevuniezh sakramantel.
- (2) Evel ma'z eus bet termenet e steuñv hon c'hendiviz, darbennet e Rodoz, ez eo an unded er feiz ur raklakadenn d'an unded er c'hevrinnoù, ha peurgetket en eukaristiezh santel. Goude d'ar bennaenn-mañ bezañ degemeret gant an holl, e ranker damantiñ d'un toullad krefen diazez anezhi. Ha ne ve ar feiz nemet entuañ gant dezgeriadoù, pe ez eo muioc'h? Ar feiz, o vezañ ur road doueek, a ranker intent evel emouestl ar c'hristen, ken a vez, ken a galon, ken a youl. En he gwirionded ez eo ouzhpenn un degouezhad *ilizel*, gwerc'heget ha kefleuniet e kevuniezh an Iliz ha drezi, en he diavaezadur lidek ha peurgetket eukaristek. Hevelep ilizegezh ha lidegezh a'r feiz a ranker damantiñ a-zevri gante.
- (3) Goude lakaat hevelep diazez d'ar feiz, e ranker diogeliñ ez eo un amplegad, klok drezañ e-unan, kent d'ar gevuniezh sakramantel, hag e vez kresket ouzhpenn dre ar gevuniezh sakramantel, anezhi eztaol buhez an Iliz hag araez d'ar c'hresk speredel evit pep ilizour. Diferañ hevelep keal a ranker evit na gamm-gregiñ e keal ar feiz evel amplegad an unded. Arabat e talvezfe koulskoude da guzhat ez eo ar feiz hevelep amplegad ha ne c'hellfe ar gevuniezh sakramantel bezañ anez ar gevuniezh feiz, ken en he ster ledan, ken e ster an dezgeriañ feizoniel.
- (4) Ouzhpenn keal ar feiz evel raklakadenn d'ar gevuniezh sakramantel hag a-geñver ganti, diouzh steuñv hon c'hendiviz, hon eus pleustret en hon emvodoù war geñver kevrinnoù an treouesti - eleze badeziant, kouzoumenn pe olevad hag eukaristiezh - etreze o-unan ha gant unded an Iliz. War-se ez eo gwelout hag-efñ emañ hon div Iliz enebet gant un diforc'h a-fet liderezh pe a-fet feizoniezh, kevere m'emañ al liderezh hag ar feizoniezh. Hag e ranker ober ur beziad sakramantel nemetañ eus an teir c'hevrinenn-mañ, pe neuze tri gread sakramantel distag? Ouzhpenn-se ez eus ivez da welout, evit a sell ar c'hevrinnoù, hag-efñ e sav an diforc'h liderezhel etre an daou hengoun ur gudenn a forc'hadenn feizoniel a c'hellfe tennañ da skoilh bras evit an unded.

*
* *

I. FEIZ HA KEVUNIEZH ER C'HEVRINENNOÙ

- (5) Ar feiz zo ken-ha-ken ur road digant Doue oc'h emziskuliañ ha respont mab-den o tegemer hevelep road. Kenwered rad Doue ha rezid mab-den ez eo. Lec'h ar gevuniez-mañ eo an Iliz. E houmañ ez eo dereet ar wirionez diskuliet diouzh trac'houn an Ebestel, diwar ar Skriturioù, dre ar senedoù hollvedel, ar vuhez liderezhel, Tadoù an Iliz, ha dedalvezet eo dre izili Korf ar C'hrist. Ar reolded hag an dezverk eus ar gread-feiz personel eo feiz an Iliz. N'emañ ket ar feiz diwar un danzead hag ur retvez poell, hogen diwar levezon rad an Awen C'hlan. "Evit ar sentidigezh ouzh ar feiz" (Rom. 1, 5) ez eo deuet ar rad d'an Abostol Paol. Ken e lavar sant Bazil: "E diagent d'an divizoù war Zoue (sermones de Deo) emañ ar feiz; ar feiz ha neket an anadatur (demonstratio). Dreist d'ar poellouriezhoù (rationales methodos) evel ma'z eo, ar feiz a zarvenn asant an ene (animam ad assendum trahens). Ne zeu ket ar feiz dre rediezhoù mentoniezhel, hogen dre c'hremmoù an Awen" (In Ps. 115, 1).
- (6) Feiz an Iliz ouzh he lidañ zo raklakaet hag eztaolet gant pep kevrinenn. Muiget anzavet hag eztaolet ez eo he feiz gant an Iliz er gevrinenn, pa'z eo bremanelaet ez eo ar c'hevrin lidet ganti. Diskuliañ an Iliz evel Korf ar C'hrist a ra an Awen C'hlan, ouzh E amparañ hag E greskiñ. Dre ar c'hevrinennoù neuze, an Iliz a vag hag a gresk kevuniez-mañ he izili.

1. Ur road digant Doue hag ur respont rez digant mab-den eo ar wir feiz

- (7) Ur road digant an Awen C'hlan eo ar feiz. Drezi e tero Doue ar yec'hedouriezh. Drezi e tenesa an denelezh ouzh kevrin ar C'hrist oc'h amparañ an Iliz hag e vez hevelep kevrin kehentet gant an Iliz dre an Awen C'hlan oc'h annezañ enni. Ne c'hell an Iliz deren nemet ar pezh a ra dezhi bout. Ur c'hevrin a'r C'hrist n'eus ken avat, hag unel eo road Doue, kevan ha digerse (Rom. 11, 29). Evit he danvez, e talc'h ganti ar feiz kement a zo feizoniezh ha pleustr an Iliz e-keñver yec'hedouriezh. Kenweet eo feizoniezh, moneadur ha lidvuhez en un hollad unek oc'h amparañ teñzor ar feiz. O kevreañ en un doare heverk damkanelezh ha pleustrellezh ar feiz, e lavar sant Yann Damask: "Houmañ [ar feiz] zo lakaet peurlvat dre gement hag ouzh o seveniñ. Un den difeiz eo, e gwir, an hini n'en deus ket feiz diouzh trac'houn an Iliz kev-ollek pe a gevugn gant an diaoul dre e oberoù direizh" (De fide orthodoxa, IV, 10,83).
- (8) Roet gant Doue ha kiminiadet gant an Iliz ez eo embannet, buhez ha dereet ar feiz en un Iliz-lec'h hewel e kevuniez gant

an holl Ilizoù-lec'h dre ar bed, eleze gant an Iliz kev-ollek a bep amzer hag a bep lec'h. Kevanaet ouzh Korf ar C'hrist ez eo mab-den dre e gevuniez (koinônia) ouzh an Iliz-mañ hewel, a vag ennañ hevelep feiz dre he buhez sakramantel ha dre Gomz Doue, ha ma vez an Awen C'hlan o werediñ.

- (9) E-se, end-eeun, e revez road ar feiz e diabarzh an Iliz nemeti en he saviad istorel fetis, termenet dre ar metou hag ar mare, eleze e pep feizad hag en holl feizidi, renet gant o fastored. Feleun ouzh hevelep road a'r feiz e rank chom mab-den atav, dre al lavarou denel hag an eztaoladoù kulturel hag istorel lies. Arabat lakaat moarvat e vije peurglok holl binvidigezh ar c'hevrin diskuliet e Yezu Krist diwar eztaolad ar wir feiz, dereet ha buhez e lid ar sakramantoù. Dre hevelep eztaolad ha dre an dud ouzh e zegemer, e c'heller neoazh denesaat ouzh gwirionez kevan ar feiz diskuliet, eleze ouzh kefleundet ar yec'hedouriezh hag ar vuhez en Awen C'hlan.
- (10) Liz d'an abostol d'an Hebreed, ez eo hevelep feiz "diogelroez ar pezh a c'houbezher, anadurezh ar pezh na weler ket" (Heb. 11, 1). Degas a ra da berzhiañ er madoù doueel. He anaout a reer ivez evel fiziañs hanvoudel e galloud ha karantez Doue, gant asantiñ d'ar gratadennoù finvezel evel kefleuniet e nouez an Aotrou Yezu Krist. Erverkañ a ra ar feiz ouzhpenn, liz d'an abostol d'an Hebreed adarre, un emzalc'h e-keñver ar vuhez hag ar bed, merket gant an doug da aberzhiñ e vennantez ha da ginnig e vuhez da Zoue ha d'ar re all, evel ma eure Krist E-unan er groaz. Dre ar feiz e vezer kevreet gant testeni ar C'hrist hag ar "morad tud" (12, 1) o c'hronnañ an Iliz.
- (11) E-se ez empleg ar feiz respont emskiantek ha rez mab-den ha kemm diastal e galon hag e spered. Rak-se ez eo un andreif diabarzh hag ur c'hemmañ, pa laka mab-den da badout gant rad an Awen ouzh e nevezif hag pa venn addurc'haat da veziadoù ar rouantelezh o tont hag o teraouiñ a-vremañ kemm beziadoù ar bed-mañ.
- (12) Raklakaet eo ar feiz d'ar vadeziant ha d'ar vuhez sakramantel d'he heul. Dre ar vadeziant, e gwir, eo perzhiañ a reer e tremenvan hag e dasorc'h Yezu Krist (Rom. 6). Eno e teraou an argerzh da genderc'hel a-hed ar vuhez kristen.

2. Lideztaol ar feiz

- (12) En Iliz ez eo ar c'hevrinennoù al lec'h dreist peb all ma'z eo buhez, dereet ha bonnet ar feiz. Houmañ eo ar bedenn gentañ graet war an danvez-badezad el liderezh bizantat: "Karg ennañ ar feiz, ar goubezha hag ar garantez ouzhit, ma veizo ez out-Te an Doue gwirion nemetañ gant da Unvab, hon Aotrou Yezu Krist, ha gant da Awen C'hlan". A-genstur ez eo hemañ ar goulenn kentañ a-berzh an Iliz ouzh an danvez-badezad, en hen-

goun lidel latin: "Petra a c'houlennez ouzh an Iliz?" Hag an danvez-badezad da respont: "Ar feiz", - "Ar feiz, petra ro dit? - Ar vuhez trafad".

- (14) Ar gredenn war se a ziavaezer en hon div Iliz gant al lavarenn: "Lex orandi lex credendi". Evite ez eo an hengoun lidel deveizer diles an Diskuliadur ha, dre-se, dezverk bonnadur ar wir feiz. Gant lideztaol ar feiz en hon div Iliz e pad testeni an Tadoù hag ar senedoù hollvedel kenlidet evel stur diogel ar feiz evit an dud a feiz. En tu-hont d'al lideztaolioù lies ez eo bremanelaret el liderezh hevelep testeni oc'h ezklekaat kiminiadezh ar Skriturioù santel. A-hend-all e vez maget lidpedenn poblod Doue gant ar feiz kiminiadet.

3. An Awen C'hlan hag ar c'hevrennoù

- (15) Sakramantoù an Iliz zo "kevrennoù ar feiz" ma vez sevenet gant Doue deasped an Iliz oc'h ezgeriañ he feiz ennañ dre ar bedenn evit doned an Awen. Ennañ e ro an Tad E Awen C'hlan, oc'h ebarzhiñ e kefleuned ar yec'hedouriezh e Krist. Amparet eo an Iliz evel E Gorf gant ar C'hrist. Adeiladet eo an Iliz gant an Awen C'hlan. N'eus road ebet en Iliz na ve diganti (Bazil Veur, PG 30, 289). Road ha rad an Awen C'hlan, e Yezu Krist, en Iliz, eo ar c'hevrennoù. En ur meulgan reizhvriat da Bantekost ez eo eztaolet kement-mañ e berr gomzoù: "Oberour pep road eo an Awen. An diouganou a ra dezhe tarzhañ. Pervshaat ar veleion a ra. Ar furnez a gelenn d'ar re zizesk. Ouzh doue-oniourion e kemm ar bec'herion. Ha sonnaat ensavadur an Iliz".
- (16) Rad an Awen C'hlan a vez deroet gant pep sakramant a'n Iliz, bout ma'z int ken-ha-ken an arouez o tegounañ ar pezh a eure Doue en tremened, an arouez oc'h erzerc'hañ ar pezh a ra bremañ er feizad hag en Iliz, an arouez o tiouganañ hag o kent-aat ar c'hefleuniadur finvezel. E-se, dre lidañ ar c'hevrennoù, ez eo erzerc'hañ, skoueraat hag anzav a ra an Iliz he feiz en unded mennad Doue.
- (17) Dav eo merkañ he devez pep kevrenn ur c'heñver diazez gant an eukaristiezh. An eukaristiezh zo dreist pep hini kiminiadezh ar feiz ma teu diouti pep anzav ha ma isurzh outi. N'eus nemeti e gwir evit kiminiadiñ ervat burzhud obererezh Doue, e gouezvoud an Aotrou kefleuniet gant gred an Awen. Rak an Aotrou a ra d'E obererezh tremen ent sakramantel e liderezh an Iliz. Dre zeren ar rad, dre ezteurel ha dervaat ar feiz e Yezu Krist ez eo kevrennoù an Iliz testenioù ar feiz.

4. Ar feiz dezgeriet ha lidet er c'hevrennoù: ar bonnadennoù feiz

- (18) E-ser ar c'henvod eukaristek e lid an Iliz degouezhad kevrenn ar

yec'hedouriezh er bedenn eukaristek (anafor) evit klod Doue. Ar c'hevrenn lidet ganti eo an hini anzavet ganti o tegemer road ar yec'hedouriezh.

- (19) Hevelep lid eukaristek, padet heñvel e endalc'hed hag e finvezelezh en Ilizoù-lec'h, en deus gwisket gante dezgeriadennoù disheñvel ha yezhoù lies o lakaat war-wel, hervez ijin pep kultur, arvezioù hag empledadurioù dibarek eus degouezhad nemetañ ar yec'hedouriezh. E kaouded ar vuhez Iliz, e-ser ar c'henvod eukaristek, ez anzav evel-henn hon daou hengoun - reterat ha kornogat - un doare liested da zegeriañ endalc'hed ar feiz lidet.
- (20) A-zeroù ez eo liammet sakramantadur ar vadeziant ouzh ur vonnadenn feiz ma tere an Iliz-lec'h drezi d'an danvez-badezad ar pep pennañ eus feizoniezh an Ebistel. Hevelep kredo a zistih e koazh ar pep kreisañ eus an Trac'houn abostolek, gant anzav ar feiz en Drinded santel hag en Iliz pergen. Pa vez an holl Ilizoù-lec'h oc'h anzav ar wir feiz, e tereont e lid ar vadeziant ar feiz-mañ nemeti en Tad, er Mab hag en Awen C'hlan. Dezgeriet disheñvel eo bet avat, hervez an amzerioù hag al lec'hioù, diouzh an degouezhoù, dre arverañ termenoù ha lavarenoù na oant ket atav peurheñvel. Endalc'h ar feiz neoazh a oa doujet gant an holl. Kredo Nikeia-Konstantinopoliz a vez en arver gant Iliz ar Reter evit ar vadeziant. Kredo an Ebistel, evel ma reer outañ, a vez dereet ouzh an danvez-badezad, gant Iliz ar Gornog, diouzh he hengoun dezhi. Liested ar bonnadennoù gant an Ilizoù n'eo ket disklot etreze e-sigur endalc'hed ar feiz dereet ha buhez.

5. Amplegadoù ar gevuniezh feiz

- (21) Ar pep retañ evit ur wir gevuniezh etre an Ilizoù eo da bep hini anezhe daveiñ da gredo Nikeia-Konstantinopoliz evel reol rezevel d'ar gevuniezh-hont evit an Iliz nemeti dre ar bed ha dre an amzer. E-se ez eo raklakaet ar wir feiz d'ar gevuniezh er c'hevrennoù. Ar gevuniezh ne c'hell bezañ nemet etre Ilizoù unan o feiz, o belegiezh hag o sakramantoù. Pa genanzavont hevelepted hag unelezh ar feiz (koulz ha hini ar velegiezh hag ar sakramant) dereet e pep Iliz-lec'h, en em anavezont an eil eben evel gwir Ilizoù Doue hag e tegemeront nep feizad evel breur pe c'hoar er feiz. War un dro ez a neuze ar feiz war zontaat ha war wellaat dre ar gevuniezh ilizek buhez e pep kumuniezh gant ar c'hevrennoù. E meur a live eus ar vuhez Iliz e wirier hevelep perzhkadur a'r feiz evel frouezh d'ar vuhez sakramantel.
- (22) Da gentañ-penn, dre lidañ ar c'hevrennoù, ez eo kiminiadiñ, deren ha piaouekaat he feiz a ra an iliziad.
- (23) Dre lidañ ar c'hevrennoù ivez e tiskouez pep Iliz-lec'h he hennad gwirion. Kendalc'hek eo gant Iliz an Ebistel hag e kev-

unan gant an holl Ilizoù heñvel o un feiz hag o un sakramantou. O hevelepted feiz a anzav an Ilizoù-lec'h gant nep hini all o lidañ ar c'hevrennoù, ken ma 'z eo kennerzhed dre se o buhez feiz dezhe. E-se, al lidañ kevrennoù zo dervaat hag anataat ar gevuniezh feiz etre an Ilizoù. Ken e c'hell feizad un Iliz-lec'h bennak, badezet en e Iliz, bezañ sakramantel en un Iliz-lec'h all. Hevelepted hag unelezh ar wir feiz etre an Ilizoù zo diskouezet gant hevelep kevuniezh er c'hevrennoù.

(24) Pa genoferenn tud eus meur a Iliz-lec'h, e vez anataet da vat ha nerzhed hevelepted ar feiz dre ar real sakramantel e-unan. Dre-se e vez atav ul lid eukaristik gant ar senedoù, ma 'z eo an eskibion bleinet gant an Awen C'hlan o vonnañ feiz an Iliz en he gwirionded. O kiminiadiñ kevrin nemetañ ar C'hrist hag o kevrannañ ar gevuniezh sakramantel nemeti, ez eo gouest an eskibion, ar gloer hag ar bobl kristen a-bezh a-unan gante, da desteniañ feiz an Iliz.

6. Ar wir feiz hag ar gevuniezh er c'hevrennoù

- (25) Un elfenn ret d'ar gevuniezh ilizel eo hevelepted ar feiz er sakramantiñ. Ar gevuniezh (*koinōnia*) avat ned eo ket en arvar gant liested an dezgeriadoù, pa c'hell pep Iliz-lec'h anzav, daoust d'al liested anezhe, an un feiz diles deuet eus an Ebistel.
- (26) E-doug ar c'hantvedoù ma oa dizisrann an Iliz, ha lies dezgeriad doueoniek d'an un feizoniezh, n'edo ket ar gevuniezh sakramantel en argoll. Savet an disrog, o deus dalc'het Kornog ha Reter da emdreiñ, a-ziforc'h avat an eil diouzh egile. Ne voent ket gouest neuze da unvennañ ken evit an eil re ken evit ar re all.
- (27) "Skor ha sol ar wirionez" (1 Tim. 3, 15) ma 'z eo an Iliz, e vir glan ha digemm fiziad ar feiz ouzh he deren ent feleun d'he izili. Pa oa treuzkredenn pe disrog un argoll evit kelenn diles an Iliz pe evit he unded, e vonne houmañ en un doare diles ha difazius, dre ur sened hollvedel, ar feiz reizh, dre soliañ war ar Bibl, an trac'houn bev ha disenteziou ar senedoù kent.
- (28) Pa zeu anat ez eo an diforc'hioù un distaol eus ar feizennou kent, ha neket diforc'hioù dezgeriañ doueoniek hep muiken, neuze e vez d'ober anat gant ur gwir disrann-feiz. N'eo ket bezus ken ar gevuniezh sakramantel. Rak gant gerioù oc'h ezgeriañ ar wirionez he-unan e rank ar feiz bezañ bonnet. Padal, dezgeriadoù nevez a'r feiz - "roet ur wech da vat d'ar sent" (Yud, 3) - a c'hell klask an Iliz, mar sav ezhommoù istorel pe kulturel nevez en he buhez, gant ma vo mennet ervat na gemm endalc'hed ar feizoniezh. E seurt degouezhioù, e c'hell an dezgeriañ dont da vezañ reolius evit an unvennadedegzh feiz. Kement-se a ampleg elfennoù-dezvarn o reiñ tro da ziforc'hañ ar pezh a zo an emdreiñ kantreizh, enc'hwezhet gant an Awen, diouzh ar pezh nad eo ket.

Gant-se :

- (29) Kendalc'hegezh an trac'houn: da gudennoù nevez e rank an Iliz bastañ respontoù azas, soliet war ar Skritur, o tuañ hag o terc'h-el evit ar muiañ gant dezgeriadoù kent ar feizennou.
- (30) Eulad klodvezel ar feiz: merzet e rank bezañ gant an Ilizoù all kement emdroad lidek en un Iliz-lec'h evel kevazas ouzh kevrin ar yec'hedouriezh evel ma 'z eo bet dereet outi ha ma vez lidet ganti.
- (31) Eulad yec'hedouriezhel ar feiz: bukañ a rank ober pep dezgeriañ feiz ouzh tonkad finvezel mab-den, evel mab da Zoue dre ar rad, en e zouekadur dre an trec'h war an ankou hag e klod-ouezadur ar grouadelezh.
- (32) Nep dezgeriadenn feiz o vont enep an eil dezverk-mañ pe egile a vez ur skoih d'ar gevuniezh. Nep dezgeriadenn feiz avat nad a ket enep hevelep dezverkoù a c'heller ober outañ ur vonnadenn gantreizh a'r feiz, na laka ket divezus ar gevuniezh sakramantel.
- (33) Diwar-henn e ranker plediñ a-zevri gant doueoniezh ar feiz-venoiou' (*theologoumena*). Sklaeraat ez eus d'ober ivez pe emdroadur fetis, bet en ul lodenn eus ar gristeniezh, a c'hellfe al lodenn all arveziñ evel kantreizh. Anzav a ranker ouzhpenn ez eus termenou a zo kemmet o ster dre an amzer. Rak-se eo poellañ da intent pep dezgeriadenn diouzh mennad he aozerion ma na vo ket silet meizadoù all enni na dilezet meizadoù a oa e preder an aozerion.

7. Unded an Iliz er feiz hag er c'hevrennoù

- (34) Ar gefridiourion, en Iliz, zo en o c'harg, dreist pep tra, derc'h-el, gwarantiañ ha kreskiñ ar gevuniezh er feiz hag er c'hevrennoù. Kefridiourion ar sakramantou ha kelennourion ar feiz ma 'z int, e kiminiad an eskeb, kevret gant ar gefridiourion all, feiz an Iliz, dezgeriañ he endalc'hed hag he darvennoù evit ar vuhez kristen, hag he diwall diouzh kement dieulañ o wariañ pe oc'h arvariañ gwirionez kevrin ar yec'hedouriezh.
- (35) Obererezh aluzonus ar gefridiourion pe ar savlec'hioù sammet gante, e-keñver kudennoù ur mare pe ur metou lakaet, zo dizisrannadus diouzh an div gefridiezh kiminiadiñ ha kelenn ar feiz, eus un tu, ha lidañ al liderezh hag ar c'hevrennoù, eus an tu all.
- (36) Da warant ha da varner he deus evel-henn unded ar feiz, ken en un Iliz-lec'h ken etre an Ilizoù-lec'h, an eskob e-unan, test ma 'z eo eus an trac'houn e kevanan gant e bobl. Dizisrannadus eo ar feiz diouzh unded ar vuhez sakramantel. Ar gevuniezh er feiz hag ar gevuniezh er c'hevrennoù n'int ket daou veziad dis-seurt. Daou arvez ez int eus an un beziad, lusket, kresket ha diwallet e-par ar feizidi gant an Awen C'hlan.

II. KEVRINENNOÙ AN TREOUESTL KRISTEN:
O C'HENVER GANT UNDED AN ILIZ

- (37) An treouestl kristen zo ur bloc'h ma 'z eo an olevad pervezhder ar vadeziant hag an eukaristiezh kefleunder an daou all. Unded ar vadeziant, an olevad hag an eukaristiezh en ur beziad sakramantel ne zianzav ket koulskoude o spesadelezh. Evel-henn, ar vadeziant dre an dour ha dre an Awen zo perzhiañ en ankou hag e dasorc'h ar C'hrist hag adc'henele dre ar rad. An olevad zo road an Awen ent personel d'ar badeziad. An eukaristiezh, dre gevuniañ ouzh Korf ha Gwad an Aotrou, degemeret er stad a ranker, a laka da berzhiañ e rouantelezh Doue, o lemel ar pec'hedoù, da gevuniañ ouzh ar vuhez doueel he-unan ha da gevuniañ ouzh ar gumuniezh finvezek.
- (38) Un under eo kevrinenoù an treouestl, evel m'henn diskouez istor al lidoù-badeziñ e Reter hag e Kornog, koulz hag an doare ma 'z intende hon C'hendadoù ster feizoniel al lidoù. Hevelep under zo darbennet groñs gant an Iliz reizhvriat. Dezhi e talc'h ken start-all an Iliz katolik. Diferañ a ra evel-se lidadur roman nevez an treouestl "ez eo unanet tri sakramant an treouestl kristen ken strizh ma varrekaont ar feizidi da gefleuniañ dre an Awen ar gefridi a zo gant pep ilizad kristen er bed".
- (39) Gant patrom an treouestl kristen, evel ma 'z eo deuet da vezañ abred-tre, e weler penaos ez intende an Iliz lankadoù an treouestl o kefleuniañ, ent doueoniezhel koulz hag ent liderezhel, an enkorfadur er C'hrist dre an ebarzhiañ en Iliz, hag ar c'hresk ennañ dre gevuniañ gant E Gorf hag E Wad en hevelep Iliz. Kement-se a revez dre c'hred an Awen C'hlan, oc'h ober gant pep feizad un ezel eus Korf an Aotrou.
- (40) Hevelep patrom a-gozh a endalc'he an elfennoù-mañ :
- (41) 1. Evit an oadourion, ur marevezh amprouiñ speredel ha kelenn ma veze stummet an danvez-kristenion a-benn o enkorfadur diwezhele en Iliz ;
- (42) 2. Ar vadeziant, gant an eskob, ar veleion hag an diagoned en e dro, pe gant ar veleion, eilet gant an diagoned, o tont war-lerc'h ur vonnadenn-feiz, erbedoù ha lidgreadoù a bep seurt ;
- (43) 3. Ar gouzoumenn pe olevad, gant an eskob e kornog, gant ar beleg - pa na oa ket eus an eskob - e reter, dre lakaat an daouarn hag olevañ, pe an eil pe egile ;
- (44) 4. Lid an oferenn santel ma veze degemeret ar vadezidi hag olevidi nevez da berzhiañ ouzh Korf ar C'hrist.
- (45) An teir c'hevrenenn-mañ a sakramanted e-doug ul liderezh kemplezh. War o lerc'h e veze ur marevezh peurazvñ katekizel ha speredel dre ar c'helenn hag ar perzhiañ alies en eukaristiezh.
- (46) Evit an div Iliz, an eorizh eo hevelep patrom, bout ma tere ar gwellañ evit piaouañ an trac'houn skriturek hag abostolek, ober-

erezh an Ilizoù kristen kentidik o vevañ e purgevunan an eil re gant ar re all.

- (47) Badeziant ar vugale, boas adal an derou, a zeuas da vezañ en Iliz an argerzh boutinañ evit ebarzhiañ kristenion nevez e leunvuhez an Iliz. A-du-rall, diouzh ezhommoù pastorel ar feizidi, e voe degaset un toullad kemmoù lec'hel er pleustrerezh lidek. Hevelep kemmoù n'o deus ket noazet ouzh meiz an unded diazez, en Awen C'hlan, eus holl argerzhad an treouestl kristen.
- (48) Er reter, ez eo bet miret under sakramanterezh an teir c'hevrenenn, o verkañ evel-se unded obererezh an Awen C'hlan ha kefleunded enkorfadur ar bugel e buhez sakramantel an Iliz. Er gornog, ez eus kavet gwelloc'h alies ampellaat ar gouzoumenn, a-benn pouezekaat an darempred etre ar badeziad hag an eskob. Gant-se ne voe ket ar gouzoumenn e kembeli voas ar veleion.
- (49) Pennkrefen feizoniezh ar vadeziant, unvennadek an div Iliz war o divoud, zo :
1. Retvez ar vadeziant evit ar yec'hedouriezh ;
 2. Gweredoù ar vadeziant : ar vuhez nevez e Krist hag an dibubiñ eus ar pec'hed kentañ pergen ;
 3. An enkorfañ en Iliz dre ar vadeziant ;
 4. Keñver ar vadeziant gant kevrin an Drinded ;
 5. Ere diziouerus ar vadeziant gant tremenvan ha dasorc'h an Aotrou ;
 6. Kefridi an Awen C'hlan er vadeziant ;
 7. Retvez an dour oc'h anataat ar vadeziant evel kouronk e-sell d'an adc'henele.
- (50) Diforc'hioù ez eus a-hend-all etre an div Iliz a-zivout ar vadeziant :
1. Ar vadeziant dre skuilhañ o vezañ er pleustr en Iliz katolik, goude ma 'z anavez houmañ pouez kezivik ar vadeziant dre soubañ ;
 2. Un diagon o vezañ en e gembeli badeziñ en Iliz katolik.
- (51) A zo muioc'h, en Ilizoù latin 'zo, diwar abegoù pastorel, evit prientiñ gwelloc'h a-se an danvez-kouzoumennidi war dreuzoù o oad-krenn, ez eus kustumet reiñ o fask kentañ da vadezidi na oant ket kouzoumennet, penaos bennak na oa ket freuzet ar sturiadurioù kenurzhiañ o terc'hel gant urzh trac'hounek kevrinenoù an treouestl. Hevelep disrenk, o tegas evel-reizh enebadennoù pe abegadennoù ken a-berzh Reizhvriaded ken a-berzh Katoliged, a c'houlenn en em soñjal a-fet doueoniezh ha pastorelezh, rak arabat e ve d'ar bastorelezh koll poell an trac'houn kentidik hag ar pouez feizoniel anezhañ. Dav eo kounañ, forzh penaos, e vez kouzoumennet ha pasket hiviziken an hini a vad-ezer en oad-poell, en Iliz latin.
- (52) War ar ret ma 'z eo stummañ ent speredel an nevezianted er feiz e ra meiz ivez an div Iliz. Gant-se e vennont merkañ ez

eus, eus un tu, ul liamm ret etre gred an Awen o werc'hekaat dre an teir c'hevrenenn peurenkorfadur an den e buhez an Iliz, respont hemañ ha hini e gumuniezh-feiz hag, eus an tu all, ne c'hell bezañ peurwelevidigezh ar feiz nemet p'o devez bet an nevezianted, ne vern pe oad e vent, kevrinennoù an treouesti kristen.

(53) Degas a reer ouzhpenn da goun e verkas Sened Konstantinopoliz, kenlidet gant an div Iliz e 879-880, e virfe pep sez e hengounioù dezhañ, Iliz Roma o virout he hengounioù hag Iliz Konstantinopoliz he re, koulz ha sezioù ar reter (kv. *Mansi*, XVII, 489b).

Cassano delle Murge (Bari),
Oasi Santa Maria, 16 mezheven 1987.



GERVA

Andreiñ, andro-: treiñ da vat a-du gant Doue, korf, ene, kalon, h.a., dre rad an Awen C'hlan. Kounaat komz Doue dre Ezekiel: "Ne vennis ket ma varvfe ar pec'her, hogen ma'z androy ha bevañ" (33, 11).

anian b.: sl. engremm.

ankrou: kontrol eus krouet.

bonnañ, -adenn (feiz): dezgeriañ endalc'hed ar feiz*. Ar bonnadennoù feiz anavezetañ zo: kredo an Ebistel, kredo Nikeia-Konstantinopoliz ha hini sant Atanaz (pe sant Hiler). Embann a reont ar pezh a oar an Iliz hag a vez buhez etni gant an ilizourion, ent personel hag a-stroll. sl. feiz.

deasped g. (Gr. επικλησις): gourfedenn o c'houlenn digant an Tad degas e Awen, war ar roadoù santel pergen d'ober gante Korf ha Gwad E Vab, ha war an elfennoù krouet ivez (dour, olev, h.a.) d'o c'hlodouezif* ha d'ober gante danvez ar c'hevrenennoù*, "rak kement a stok an Awen C'hlan outañ a vez santelaet ha kemmet" (s. Kirilloz Yerusalem).

degounañ, -adenn: degas da goun eus obererezh yec'hediñ* Doue evidomp, dreist-holl eus ensavadur sakramant Korf ha Gwad ar C'hrist.

disrog g. (Gr. σχίσμα, "frazilh", kv. Yn 9, 16, h.a.). An d. zo an disrann furmel eus unded ha peoc'h an Iliz. Diforc'h eo eus an dreuzkredenn, pa na vez ket dre ret anv a zisrann feiz. Kontrol d'ar feiz eo an dreuzkredenn; kontrol d'ar garantez eo an disrog. Disrog eo kement treuzkredenn; hogen kement disrog n'eo ket treuzkredenn.

engremm(où) (Gr. ενέργεια, kv. Fil. 3, 21, h.a.; "nerzh(où), gremm(où) e Doue, eus diabarzh Doue"). Ent reizhvriel, ez eo diforc'h engremmoù Doue diouzh E anian. Pa reer anv eus Anian Doue e verker ez eo Doue trehontel, dreist-anav, dreist da bep tra krouet. A-hend-all emañ "beplec'h hag o leuniañ pep tra". Dre E engremmoù e c'hellomp perzhiañ ennañ. An engremmoù ned int ket elfennoù diforc'h eus an Drinded, hogen Doue E-unan - "ar fiñv eus Goulou Doue" - o'n em reiñ, adal derou ar grouidigezh, evit klodouezadur* mab-den hag ar grouadelezh a-bezh. sl. rad, kenwered.

eukaristiezh b.: 1) An e. zo ersav reizh an den krouet e-keñver E Grouer. Ober e. - pe well kevradiñ Doue - zo kanañ bennoz dezhañ (Gr. ευχαριστία = Hb. *barakoth*, "bennozhioù, trugarekadennoù, kevradoù"). Dre an e., dre ar c'hevradif, e tiskouez mab-den e anaoudegezh da Zoue, en anv ar grouadelezh, oc'h anaout an ere etre ar grouadelezh hag he C'hrouer hag o virout, dre un degounañ* anaoudek, al liamm o kevren ar bed krouet gant e Grouer. Kevradif zo daskor da Zoue ar pezh hon eus digantañ.

2) Ent strizh ez eo anvad ur gevrinenn *. Pa ensavas an Aotrou sakramant E Gorf hag E Wad, "e kanas bennozh / e trugarekaas" (ευλογησας, Mzh. 26, 26; Mk. 14, 22), "e kevradas / e lavarar ar bennig" (ευχαριστησας, I Kor. 11, 24). Gant-se ez eo an e. "kevrinenn ar c'hevrennoù", pa 'z eo krejzet warni an holl sakramantoù. Bez' ez eo sakramant an Dasorc'hed ha kevrad * ar c'hrouadur ouzh e Grouer; bez' ez eo kevrad an Iliz ha respont ar C'hrist.

feiz (Gr. πίστις / αλήθεια = Hb. *emûnah* diwar *aman* kv. *amen*): arabat kammgeder feiz / fiziout ha krediñ (evel Luther, Pascal, Kant, Kierkegaard, h.a.). Evit ar gristenion – hag ar reizhvriaded pergen –, ez eo ar feiz diwarvar ergorek ar wirionez hag anaoudegezh (kv. s. Yann oc'h ober gant γῶσις evel kenster da πίστις). Ar feiz zo evit mab-den entuañ da vat, dre garantez, gant Mammenn e voud (kv. Rom. 3, 28) ha respont ouzh galv ar C'hrist, oc'h anzav ez eo Mab Doue an Dasorc'hed hag o tont da vezañ mein bev an Iliz.

feizenn b. (Gr. δόγμα): ur f. zo ur wirionezenn, kelennet gant an Iliz, evel parzh eus kevrin ar Yec'hedouriezh; da viken ez eo didermenet gant an Diskuliadur ha bonnet gant an Iliz, dre ar senedoù hollvedel * pergen. En Iliz Roma, e c'hell ur feizenn bezañ embannet gant ar Pab. Evit ar reizhvrielezh ez eo ar poen-loc'h evit anaout an Awen C'hlan ha bevañ enni.

feizoniezh (# doueoniezh) b.: kelenn an Iliz a-zivout kevrin ar Yec'hedouriezh. En Iliz Roma e vez meizet alies ar feizoniezh evel gwirionezoù tebouezek oc'h amparañ ur reizhiad. # **doueoniezh** b.: a zo anaout ez eo Krist Doue (diwar-lerc'h Origenos, 3, 1069, e reer gant an termen-mañ evit merkañ doueded ar C'hrist (Gr. θεολογία = Sl. *boroslovie*). An doueoniezh zo war un dro dezgeriañ hevelep buhezadur dre gelenadur an Iliz.

Gwelloc'h leuskel gant **teologiezh** ster ar geriadurioù: "gouezoniezh o studiañ Doue hag ar relijion". sl. **feiz**; **feizenn**.

feizveno g.: meno, kinnig a feiz na vez ket kelennet gant an Iliz – en Ilizou reizhvri a-wael – evel feizenn *, dre na sell ket war-eeun ouzh kevrin ar Yec'hedouriezh *.

Da skouer, d'ar 15 eost, e lider gouel Hunidigezh (= Sl. *Uspenie*, Gr. Κοίμησις) Mamm Doue, en holl Ilizou reizhvriat; ur feizenn * ez eus graet anezhi gant ar Pab Pius XII, pa nad eo nemet ur feizveno gant ar reizhvriaded o vezañ na sell ket war-eeun ouzh kevrin ar Yec'hedouriezh.

goubez g. (Gr. ἐπίς), -iñ v.: ar g. zo ersav bev mab-den e-keñver ar Yec'hedouriezh, an Dasorc'h, ar Vuhez trafad, Klod Doue. Un heberzh eo koulz hag ar feiz hag ar garantez. Dav eo digemmeskañ an termen-mañ diouzh **goanag**, -iñ (Gr. εκ-, προσδέχομαι) nad eo nemet un arvez eus ar goubez, un ersav gortoz; d.sk. goanag Poblad Israel o c'hortoz ar Mesiaz.

gouezvoud g.: G. Doue zo E annez e-metou an dud dre arouezioù lies, E ziskuliadur hag erzerc'hadur E glod. Kehentiñ a ra Doue E garantez ouzh mab-den, test E Ouezvoud anezhañ.

kenwered g. (Gr. συνεργία): 'kenlabour' etre rad Doue ha mennantez mab-den en e hent davet Doue. sl. **rezid**.

kevrad g., -iñ v.: sl. **eukaristiezh**.

kevrinenn b. (Gr. μυστήριον; Sl. *tajinstvo* "sekred, kuzh, rin"): ent lizherennel u.d.b. "kloz", kuzh, ha, padal, "digor" bremañ en Iliz evit mab-den. Hogos kenster eo da sakramant, goude ma verk fraeshoc'h unded ar c'hevren. Unel eo ar c'hevren kristen, diavaezet e arvezioù lies dre veur a gevrinenn o kehentiñ rad Doue ent personel ouzh ar feizad.

klodouez, -ad g., -iñ v.: ar c'hlodouezad zo emziskouez E Glod gant Krist. Gouellet en doa E zoueelezh, "o tegemer saviad ur sklav" hag ouzh E ziskibion e tiouelias E Glod. Galvet eo mab-den da vezañ klodouezet gant Doue, eleze da vezañ gwelevet gant Goulou an Drinded, da arvestiñ Klod Doue er bed da zont.

kouzoumenn. sl. olevad.

kevolle, -egezh; -el, -elezh (Gr. καθ'ολον, "holl en unan"): unan eus perzhioù an Iliz, o lakaat a-unan an douar hag an neñvoù, an amzer hag an egor, an unan hag al lies. Unaniñ ha kevredañ a ra an Iliz an denelezh a-bezh e kefleunded Korf ar C'hrist. "Kevolle eo an Iliz e kement parzh anezhi, pa 'z eo pep parzh enni un hevelep gant ar bloc'h, un erzerc'had eus ar bloc'h, ur werzhad gant ar bloc'h, ha pa na revez ket en diavaez eus ar bloc'h" (*Bonreizh feizoniel*, V, 7; kv. ivez teul München). N'eo ket un termen egorel o verkañ astenn an Iliz dre ar bed a-bezh, ar pezh a zo **hollvedegezh** e ra an Iliz eus ar vadezidi izili eus Korf ar C'hrist – ment a-zerc'h –, dre he hollvedegezh – ment a-zremm – e tiraez "pep broad, gouenn, yezh ha pobl".

olevad (= **kouzoumenn**) (Gr. μύρωμα < μύρον, "olev"; Sl. *mirpomazanie*): dre an o. e teuomp da vezañ **Kristoi**, eleze "olevidi" (evit an diforc'hioù gant Iliz Roma evit ar gouzoumenn, sl. teul Bari, 43, 48 pergen, hag hon raklavar ivez).

rad g. (= **gras**): merkañ ez eo **ankrou** * ar r. evit ar reizhvrielezh, pa 'z eo Doue E-unan o'n em reiñ ent radek (evit ur "bennozh Doue"), dre E engremmoù * **ankrou** *, d'E grouadur poellek ha rez evit E zoueekaat. sl. **engremm, rezid**.

reizhvri (ha **deveradoù**) (Gr. ὀρθοδοξία, kv. δόξα, "meuleudi, bri" er Bibl ha kammed "kredenn, meno" evel e gresianeg klasel; Sl. *pravoslávie* = reizhvri-); reizhvriel eo ar feiz, pa lider an Drinded dre ur meuleudi reizh, dre zougen bri dezhi evel ma tere.

rez, -id: ar **rezid** zo unan eus perzhioù mab-den, bet krouet rez gant Doue. Doue en em ro atav dezhañ ent radek ha rez eo mab-den d'E zegemer pe d'E nac'hañ. sl. **rad**.

senedoù hollvedel (Gr. οικουμενῆ, kv. I Kor. 3, 22; Lt. *general-*

is): An Ilizoù reizhvriat ne anzavont nemet ar seizh sened hollvedel lidet kent d'an disrog. # ekumenek pe kedilizek (ster arnevez). kv. kevolleek.

trac'houn g. (Gr. παράδοσις, I Kor. II, 2, h.a.): an t. zo ar fiziad dereet gant ar C'hrist d'E Ebestel ha d'E Iliz. Diforc'h eo an t. hag an hengoun. Unel eo t. an Iliz, bout ma'z eo dishefvel hengounioù (Gr. παραδομένα) Iliz Roma hag an Ilizoù reizhvriat; kounaat frazenn vrudet Libosus eus Vaga, e-kerz sened Kartada (257): "Lavaret en deus an Aotrou: 'Me zo ar Wirionez' ha neket 'Me zo an hengoun'.". sl. feiz.

trafad (ha deveradoù) (Gr. αἴματις; Hb. *ôlâm*): An amzer zo liammet ouzh ar grouidigezh. An drafadelezh zo en tu-hont d'ar grouadelezh, e-se tre d'ar badelezh; ned eo ket un 'amzer' o padout atav, hogen ar bremañ, an **hiziv** (kv. Gr. τήμερον, Lt. *hodie*, el liderezh) dalbez, atav. Kounaat "Kent da Abraham bout, Me zo" (Yn 8, 58).

[Dibabet fall eo, d'hon meno, ar ger **peurbadel** ha dreist-holl **peurbadus**; sl. GReg. 714: **peurbadus**, "*perpétuel*".]

treouestl g. (Gr. μύστις; Lt. *initiatio*; Rs. *posvja*-"*initler*; *consacrer*; *dédier*): eus teir c'hevrenn an Doue triunan e c'hoarvez kevrin an t. kristen (kv. teul Bari, II). "N'eus buhez hep bezañ ganet; alese kevrinenn ar **vadeziant** ouzh hon lakaat da vezañ ganet d'ar vuhez nevez ha **trafad** * deroet gant Doue d'an den dre Yezu Krist. Ne spir ket avat bezañ ganet da vuhez ar C'hrist; ret eo kaout ivez galloud, gremm ha nerzh da genderc'hel da vevañ; hevelep roadoù eo a zegas kevrinenn an **olevad** ma tegemer mab-den an Awen C'hlan, mat ha buhesaer. Maget e rank ar vuhez bezañ ivez. () Etrezek an ankou e kas hon c'hevuniañ gant ar bed. Ur magadur all a zioueromp da vevañ dimp ar vuhez **trafad** (), "banvez rinel Mab Doue" eo, Korf ha Gwad ar C'hrist, degemeret en eukaristiezh" (Tad Thomas Hopko). sl. **olevad**; eukaristiezh; kevrinenn.

yec'hed-: (Hb. יְשׁוּעָה, *ješû'ah*; Gr. σωζω < σωος, "yac'h"). Ar Salver, ar **Yec'hedour**, eo Krist, Mab Doue, enkorfet "evidomp-ni, an dud, hag evit hon **yec'hedouriezh**" (Kredo). 'Klañv' eo an denelezh, a-c'houde an diskar, gant ar pec'hed, ar c'hleñved hag ar marv; dre E enkorfadur eo deuet Mab Doue da **yec'hediñ** mab-den, d'e adunaniñ gant Doue.

OFERENN
EVIT
UNANIEZH AR GRISTENION

Kempedennoù:

Evit an Ilizoù disrann war ar bed e'z pedomp, Aotrou, dezhe d'ober o hent evel breudeur er garantez davet an Unaniezh er Wirionez, ma vo gwelevet poell ha kalon o c'hefridiourion hag o feizidi, diouzh kanañ klod dit anan, dre ar C'hrist, Penn an Iliz, ouzh Goulou triwezel an Doue triunan, a holl viskoazh da virviken.

H Amen.

Evit kristenion Reter ha Kornog e'z pedomp, dezhe da vout peurunanet adarre er Feiz reizhvriek hag er garantez kevellet, evit embann an Tad, Mammenn hep ken all d'an doueded, hag an Unvab, Erzerc'her an Ankrou, hag an un Awen, Deroerez an doueelezh, Doue nemetañ a holl viskoazh da virviken.

H Amen.

Pennad:

Goulou da vout diskuilh d'ar broadoù, * ha Klod da 'z Poblad, Israel.

k P'o deus gwelet va daoulagad da Yec'hedouriezh, * aozet ganit dirak an holl dud.

Abostol:

Lennadenn eus lizher an Abostol Paol da Efeziz, er pennad 4, gwerzadoù 1 da 7:

Va breudeur: ho aspediñ a ran, pa'z on prizoniad evit an Aotrou, da vevañ evel ma tere ouzh ar stad ma'z oc'h galvet, gant pep izelegezh, kuñved ha pasianted; tremenit an eil diouzh egile gant karantez, o tamantiñ da virout unanded an Awen dre liamm ar peoc'h. Bezit ur c'horf hag ur spered, evel ma'z oc'h galvet d'ur goubezha nemetañ: un Aotrou, ur Feiz, ur Vadeziant; un Doue ha Tad an holl, a zo dreist pep tra ha dre bep tra hag ennoc'h-holl. Padal, da bep hini ac'hanomp ez eus roet ar rad, diouzh ma pouez ar C'hrist E roadoù.

H Bennozh da Zoue.

Allelouia :

K Aotrou, selaou ouzh va fedenn * ha ra vezo va garm betek ennout.

Aviel :

Lennadenn eus an Aviel santel hervez sant Yann,

H Klod dit-Te, Aotrou.

er pennad 17, gwerzadoù 11 da 25 :

Tad santel, dre 'z Anv, diwall ar re 'm eus diganit, ma vefont Unan evelomp. Tra m'edon gante, me o diwalle dre 'z Anv; ar re 'm eus diganit a ziwallen, ha n'eus hini anezhe kollet - nemet paotr an argoll, evit d'ar Skritur bout kefleuniet. Ha bremañ ez an davedout; evel-henn e lavaran er bed, evit ma vo leizh va levenez enne. Da Gomz 'm eus tremenet dezhe, hag ar bed en deus o c'hasaet, pa nad int ket eus ar bed, evel nad on-me ket eus ar bed. N'eo ket d'o lemel eus ar bed e 'z pedan, hogen da sevel an arovant diwarne. Ned int ket eus ar bed, evel nad on-me ket eus ar bed. O gouestl d'ar wirionez; ar wirionez eo da Gomz. Evel ma 'c'h eus va degaset er bed, 'm eus end-eeun o c'haset d'ar bed. Evite en em ouestlan ma vefont o unan gouestlet d'ar wirionez. Ned eo ket evite hepken e pedan, met evit ar re o devo feiz ennon diwar o lavar, ma vefont holl en unan, evelomp, Tad, ennon, ha me ennout, ma vefont unan ennomp ivez, diouzh m'en devo feiz ar bed ez on ganit degaset. Ar C'hlod 'm eus diganit 'm eus tremenet dezhe, ma vefont unan evel ma 'z omp-ni unan, me enne ha Te ennon, ma vefont ervat en unan, ma 'z anavezo ar bed ez on ganit degaset ha ma 'c'h eus o c'haret evel ma 'c'h eus va c'haret. Tad, ar re 'm eus diganit, me 'venn el lec'h ma vin ma vefont ivez ganin, ma welfont va C'hlod a 'm eus diganit, pa 'c'h eus va c'haret, kent d'ar bed bout graet. Tad a gevionez, ar bed n'en deus ket da anavezet; me avat 'm eus da anavezet hag ar re-mañ o deus anavezet ez on ganit degaset.

H Meuleudi dit, â Grist!

Mouladeg prevez dre luc'heilañ. Sekretour : Jozeb an Devedad.
Iliz reizhvriek. 11, straed P.-Salaun, Plouber 22300 Lannuon.